


— 4 —.

Ni peurvuya, Canerien a vepris ar C'hafé
 Ze so cos ma reprenomp ar merc'het ha grague :
 Ar Güin, pa er c'hemener gant moderation
 A rocourach d'ur C'hancer da gana ur chanson.

Poent e cavàn fininissa, amplic em eus comzet
 Efit ar seurt a guerfot, me ne sourcian qet ;
 Efit, Güin, efit Cafe, Liqueur pe Odevi,
 Mes dioüallit absolu do gavet fachiri. FIN.



CHANSON NEVEZ

461

389

ME meus choaset ur Vestrez a Escopti Treguer,
 Ar vrava crouadures formet galver va Zalver ; *gant*
 Is, ne zeus nemert hi dindan ar firmamant,
 A guement a vez crouet herves va zantimant.

Me zo ur c'hloarec yaouanq o poursu va studi ;
 Am eus lezet va leoriou, laqet em fantasi
 Da garet ur femelen, fleuren an oll merc'het,
 Un objet fur a parfet, gant an oll admiret.

Qenta m'am beo an enor va mestrez, d'ho qelet,
 E voa e Bêret Plunet goude an Ofern-Bred ;
 Eno tre remerqis ho craç hac o fêçon,
 Ho qenet, hac ho speret, hac ho perfection.

Ho tooulagad a verve evel an eol ardant,
 Ho tiou jot ru, ho tal gueun evel un diamant,
 Ma teu's da lavaret em c'halon, em speret,
 E voalc'h un Æl evurus eus an en disqenuet.

O cessit, C'hloarec yaouanq, ô cessit da barlan !
 Goneet hoc'h eus va c'halon gant ho comzou charmant ;
 Goneet hoc'h eus ar victor, ho me a vo qiriec
 D'ho caret a vir galon gant enor ha respect,

— 5 —

Un de voan o pourmeni gant un galon gontant,
 O sonjâl em Mestrezic, un objet excellent,
 Pa glèvis aziouc'h ve fenn ur voez o lavarat ;
 Ret è servicha Doue, lest ho muya caret.

O pebes moez a glevân, va Doue-oll-buissant,
 Pehini drompl va speret ha va ententamant,
 O prononç dîn un arret a separation,
 O Doue, pebes glac'har ha desolation ?

Muya tra am gra nec'het hac ra chagrin din.
 Eo celvet al lapousset o cana a us dîn,
 Ma laront dîn a ur voez : heuilloimp ar c'hloarec qez,
 Ha tachomp d'e gonsoli betec ti e vestres.

Venus, Mam da Gupidon, Roue ar Bayanet,
 Pehini a zistruje an infideliqet,
 A behân da scuilt varnon peb sort punition,
 Mar manqân-me d'ho caret, va douç, a vir galon.

Mar dê Doue a command, Cloarec, oboisset,
 N'en n'eus netra refusabl da redemtor ar bed ;
 Bremân me a vel patant caret zo dinatur,
 Carout hep beza caret a zo displijadur.

Bonjour dêc'h, va Mestrezic, bonjour dêc'h a larân ;
 Cetu me deut d'ho quelet vit ar vech diveân,
 Da brononç dêc'h un arret a separation.
 Nemedoc'h am soulachfe ranna raï va c'halon.

Autrou Doue, va Doue ! petra rìn-me bremâ,
 Dilezet gant ar bed oll, gant va douç da guenta !
 Bremân me renq ober evel an dursunel,
 Pa vo collet ganti he far, en em les da vervel.

FIN.